

'Du-mañ da gostez

'Du-mañ da gostez Pariz, mon cher ami
'Du-mañ da gostez Pariz, mon cher ami
Ez eus ur plac'h yaouank Don daine Dondon
Ez eus ur plac'h yaouank Don daine Don

He deus tri amour fidel, mon cher ami
He deus tri amour fidel, mon cher ami
Me 'oar pehini (eo) he c'hoant Don daine Dondon
Me 'oar pehini (eo) he c'hoant Don daine Don

Ar c'hentañ 'zo keginer ...
An eil 'zo paotr ar gambr ...

An trede 'zo kereour ...
Hennezh eo tout he c'hoant ...

Hag eñ deus graet ur botoù ...
Demeus e lèr lijer [pe : "botoù e lèr lijer"]

En ur stardañ he botoù
Al las a zo torret

En ur zastum anezho
Dezhi 'n deus lavaret

Me ho karo koantenig
Da gousket em c'hichen [pe: un nozvezh da gousket]

En ur gwele alaouret [pe: kempennet]
Ha leun a dantelez [pe: bordet a dantelez]

E pevar korn ar gwele
Un aval orañjez

Ha war ho treid o kanañ
Ur rosignol bihan

Kan 'ta, kan 'ta labousig
Ma kousko va mestrez